

**Mari-Louis**

Goude an ofern e rannas e galon  
 O klevet an ordrenanç o lenn gant ar person.

– Ar sa, eta, potret, ma he deud an ordrenanç  
 ma ranker kaout soudardet da chervich ar roue Frans.

e vond er mez ar vered a rankontras he blac'h  
 Konstritet humiliet hag hen dezolet bras

Otrou Doue va mestrez partia e vo red  
 mar bid eur soudard vaillant a non pas eur poëltroñ  
 C'houi a vo rekompanset gant ar roue bo(u)rbon

Pa vi erruet en arme diskriv lizer dime  
 a neuze me rai ive kerkent am bolonte

a ben tri mis goude a mond Mari Louis  
 Komeret alchoëz e frez komeret tri c'chant skoët  
 mond gato da bors-lois  
 lakad ober eun habid evel da eur bourc'his

Pa arruas en arme e haruas er mèmeus rejimant  
 el el'h ma vor e mignon hag e zeas gantan de kamarad.

A ben c'houec'h via goude monet Mari Louis  
 Da c'houlen konje dezo da zond d'ar ger  
 Da vellet ho ligne  
 Neuze c'houlen ive konje eur soudart iaouank  
 Pini voa nem angajet gati er rejimant

A mond ar mezt neuze da skriva an daou konje  
 Dezo da zond d'ar ger da vellet ho ligne.  
 Dra ma tostaent dar ger ar plac'h a Yan ie  
 erru on tost d'am bro dija a drugare Doue.

ar goaz a lavare o skeï var boul e galon  
 me am boa er bourg man eun dousik marion

me am boa er bourg man eun dous a garien parfet  
mes me a garie c'hoas muioc'h an Otrou Doue.

— Penoz ta emezi ne ouzout ket piou oume  
Me eo Mari Louis ta zoz ta Karante  
Me eo Mari Louis ta zoz ta Karante (1)  
Pini zo c'hoëc'h vla zo oc'h ta euil en arme  
hag o kouskat beb noz ed da ed da koste.

Penoz Mari Louis no poa dinn lavaret  
Delhel va hallon noz de da veza tourmantet

— ar-ça ta emezi dem da ti ar person  
Da gonta dezan darn dimeus on rezon

Va c'hentel zo studiet marteze biskoas plac'h  
nen deveus hen spontet

— Debonjour otrou person, na c'houi a zemesfe  
na daou soudart iaouank o tristeï doc'h an arme  
na daou soudart iaouank o distrei doc'h an arme  
a zo kontant den em unissa an eil gant he gile.

— setu, eme ar person, setu eun affer sod  
Biskoas nem moa klevet laret e vije demezet daou pod.

— penos otrou Person ne poa c'hui ked klevet  
Koms dorc'h eur plac'h iaouank a voa e neum angajet  
Koms doc'h a eur plac'h iaouank e hanon Mari-Loïs  
Ginidig doc'h ar barres badezet en ilis

— han — ia — Mari Loïs me hanave breman  
me a ia doc'h eureuji ne gousto did netra

a pa zint demezet eureujet en ilis  
ar Roue a houlen goëlet Mari-Loïs

Na kerkent hag e c'her presantet er pales  
Na kerkouls d'ar Roue evel d'ar Rouanez

— Me eo Mari Loïs, war ober an exercis  
a skei eun tol sabren koulz a va c'habiten

Rag se o havertissan tud iaouank pa zeot dan arme  
Kleze oc'h o goste Kokarden doc'h ho pen  
a peb a bistolen evid e neum zifen.

Moris Follezour, 18 mars 1851.

(1) *Ce vers est répété dans le ms.*